

Redadeg 2024 :

A-benn bloaz e tegouezho ar Redadeg e Montroulez d'ar sadorn 25 a viz Mae / *D'ici un an, la course pour la langue bretonne arrivera à Morlaix le samedi 25 mai*

Bep eil bloaz e vez redet evit ar brezhoneg. Ur Redadeg a eilek evit an holl hag evit ar blijadur. E 2024, e vo redet 2222 gm etre Beg ar Raz ha Montroulez eus ar 17 betek ar 25 a viz Mae. Amañ emamp hiziv evit kregiñ da vat gant aozadur an degouezh, skipailh Ar Redadeg ha skipailh KLT - Ti ar Vro Montroulez o labourat asambles. / *Tous les deux ans est organisée la course pour le breton. C'est une course en relais accessible à tous et pour le plaisir de partager la culture et la langue bretonne. En 2024, nous courrons 2222 km entre La Pointe du Raz et Morlaix du 17 au 25 mai. Nous sommes réunis aujourd'hui pour commencer l'organisation de l'arrivée avec l'équipe de la Redadeg et celle de KLT, la fédération des associations bretonnes du pays de Morlaix.*

I/ Gweladenniñ ar SEW & Porzh a enor Ar Manu, lec'h gouel an degouezh / *Visite du SEW & de la Cour d'honneur de la Manu, le lieu de fête d'arrivée*

Gouel degouezh Redadeg 2024 a vo lidet d'ar Sadorn 25 a viz Mae 2024 en ul lec'h arouezel, ar Manu staliet e Montroulez. Div blijadur a vo. Unan sonerezh rock ha folk, e sal vras sonadegoù ar SEW, hag egile, troet war-zu ar sonerezh hengounel gant ur fest-noz bras war porzh a enor ar Manu. Hiziv an deiz e c'hell an aozerien kemenn d'an holl e vo ar strollad Fleuves war al leurenn, mil anavezet ha plijet d'an holl.

An arvesterien a c'hello baleata war al lec'h er keriadenn vras kevredigezhioù breizh.

A-raok ar gouelioù, d'ar Gwener 24 a viz Mae e vo aozet ur veilhadek mod ar vro gant K.L.T – Ti ar Vro Montroulez e tavn ar SEW. D'ar Yaou 23 e vo kinniget ur pezh-c'hoari e brezhoneg e c'hoariva Bro Montroulez. / *C'est en effet dans ce lieu emblématique de la ville Morlaix, la Manu, que se déroulera la fête d'arrivée de la Redadeg le samedi 25 mai 2024. Deux ambiances seront proposées. L'une, rock et folk, dans la grande salle de concert du SEW ; l'autre plus traditionnelle avec notamment un grand fest-noz dans la Cour d'honneur de la Manu. Les organisateurs sont en mesure dès à présent d'annoncer la présence du groupe Fleuves, l'un des fleurons des groupes musicaux de la scène bretonne, porte-étendard des nouvelles musiques bretonnes.*

Le spectateur pourra par ailleurs déambuler dans cet espace dans un grand village des associations bretonnes.

En amont de ce grand évènement festif, le vendredi 24 mai, K.L.T. - Ti ar Vro Montroulez, organisera une veillée bretonne au bar du SEW, et l'avant-veille encore (le jeudi 23 mai) l'association proposera une pièce de théâtre en breton au Théâtre du Pays de Morlaix.

II/ Galv raktresoù 2024 / *Appel aux projets 2024*

Dont a ra tadoù ha mammoù gant o bugale, tud-kozh gant o bugale-vihan, re yaouank gant o mignoned, da redek 100 pe 1000 m, an holl a-gevret. An holl troet war-du un dra hepken : ambroug dougerien ar vazh-test, hag ar gemennadenn e brezhoneg a zo enni, dizehan. Gwerzhet e vo ar c'hilometroù d'an dud, d'ar strollegezhioù, d'an embregerezhioù, d'ar c'hevredigezhioù,... da lâret eo d'an nep a fell dezhañ kemer perzh en darvoud a-benn skoazellañ ar brezhoneg. An hanter eus ar gounidoù az aio da arc'hantiñ

rouedad ar skolioù Diwan. An hanter all a sikouro kevredigezhioù da implij, diorren ha treuzkas ar brezhoneg er gevredigezh a-vremañ. Ar galv zo lañset war hol lec'hienn internet abaoe miz Genver hag e pado betek kreiz miz Even evit kas an teuliadoù. / *Les familles, jeunes et moins jeunes, enfants, parents et grands-parents courent ensemble. L'enjeu est de transporter un message en breton à travers la Bretagne, sans s'arrêter et le grand gagnant est la langue bretonne. Les kilomètres sont vendus aux particuliers, aux collectivités, aux entreprises, aux associations... c'est à dire à toute personne privée ou morale souhaitant contribuer à l'événement et apporter son soutien à la langue bretonne. Les bénéficiaires sont redistribués pour moitié au réseau Diwan et l'autre moitié à des projets qui favorisent l'usage de la langue au quotidien dans la vie sociale et familiale. L'appel à projets est lancé sur notre site internet depuis janvier et durera jusqu'à mi-juin pour nous envoyer les dossiers.*



www.ar-redadeg.bzh

Darempred / Contact :

Ar Redadeg : Cyril Lelong 06 13 30 19 49 cyril@ar-redadeg.bzh

KLT – Montroulez : Kristian Le Mener 02 98 63 98 79 klt@wanadoo.fr